



KOAD-KEV

LUN FASK 1990



BRO GOZH MA ZADOÙ

Ni Breizhiz a galon, karomp hon gwir vro !
 Brudet eo an Arvor dre ar bed tro-dro !
 Dispont 'kreiz ar brezel, hon tadoù ken mat
 A skuilhas eviti o gwad.

Diskan Ô Breizh ! Ma Bro ! Me ' gar ma bro,
 Tra ma vo 'r mor 'vel mur 'n he zro,
 Ra vezo digabestr ma bro !

Breizh, douar ar Sent kozh, douar ar Varzhed,
 N'eus bro all a garan kement 'barzh ar bed,
 Pep menez, pep traonienn da'm c'halon zo ker :
 Enno ' kousk meur a Vreizhad taer !

Ar Vretoned a zo tud kalet ha kreñv,
 N'eus pobl ken kalonek a-zindan an neñv,
 Gwerz trist, son dudius a ziwano,
 Ô ! pegen kaer ez out, ma bro !

Mar deo bet trec'het Breizh er brezelioù bras,
 He yezh a zo bepred ken bev ha biskoazh,
 He c'halon virvidik a lamm c'hoazh 'n he c'hreiz,
 Dihunet out bremañ, ma Breizh !



GWIR VRETONED !

Diskan Gwir Vretoned, tud a galon, war-sav !
 Da ganañ gloar da Vreizh hor Bro,
 Ha da ziwall teñzor he yaouankiz :
 Ar yezh, ar peoc'h hag ar frankiz.
 War-sav ! War-sav !
 Da ganañ 'bouez-penn :
 Breizh da virviken ! Breizh da virviken ! } 2 wech

Ô ma Breizh gant da dourioù brudet,
 Da vor glas ha da venezioù,
 Da vrug ruz ha da lann alaouret,
 Te zo koant dreist an holl vroioù.

Ne'z eus ket, 'vel e-touez hor c'herreg,
 A dud vat, seder ha nerzhus ;
 Ne'z eus ket, 'vel en hor brezhoneg,
 Sonioù drant, gwerzioù dudius.

Hon tud kozh, tud leal ha santel,
 Start evel hon derv kalet,
 A ouezas mirout da Vreizh Izel
 He brud-vat, he nerzh, he c'hened.

Bretoned, savomp hor c'halonoù,
 Ha touomp e talc'himp atav
 Da vale war roudoù hon tadoù,
 Keit ha ma'z ay ar bed en-dro !

KAN-BALE AN A.R.B.

Poent eo stagañ Bretoned gant stourm meur ar vro,
 Poent eo skubañ an oaled, kempenn an ero,
 Un deiz e vo sklaer an amzer war heñchoù don ar brezel kuzh
 Un deiz e vo loc'hus ha taer distro Arzhur war e varc'h ruz.
 Poent eo skubañ an oaled, kempenn an ero,
 Poent eo stagañ Bretoned gant stourm meur ar vro.

Dinec'h ha krenn Bretoned ' vo tenn d'ar stourmer
 En noz ' tarzho kastellioù, gweleoù ar gwasker
 Na kriz e vo heol an argad d'ar vourc'hizien ha d'an treitour
 Na kaer e vo luc'h an tantad da galon Vreizh, d'hec'h arga-
 En noz ' tarzho kastellioù, gweleoù ar gwasker [dour
 Dinec'h ha krenn Bretoned ' vo tenn d'ar stourmer.

Ret ' vo dastum Bretoned toc'hed ar brezel
 Eost du ar re ' zo daonet eo trec'h Breizh Izel
 Bugaligoù ha tud kalet a roio bec'h da chaseal
 Da vountañ 'maez ar C'hallaoued da reizhañ hent da vout
 Eost du ar re ' zo daonet eo trec'h Breizh Izel [feal
 Ret ' vo dastum Bretoned toc'hed ar brezel.

An deiz a zo ken kuzhet war hent an distro
 Fenoz ' vo kuntuilhet enor ar vammvro
 Kerkent dihun, kerkent dispak ha bec'h da loch an enebour
 N'eus forzh penaos, n'eus forzh perak e redo nerzh 'vel red
 Fenoz ' vo kuntuilhet enor ar vammvro [an dour
 An deiz a zo ken kuzhet war hent an distro.

NETRA NA DEN NA VIRO OUZHIMP DA VONT WAR-DU AR PAL !
